

DARVOUDOU AR BREZEL

Ar Blaveziou 14-15-16

Ton a zezirfet

539

Ier Couplet

Mar mije bet ar furnes, a neva Salomon
Speret parfet da riman, vel ar guir Ciseron
Sklerigen ar profetet, Moïz a Cesar
Groet a mije eur recit, vije leun a c'hlahar,

2

Groet a mije eur récit, skrivet gant an daëlou
A gouez demeuz daoulagat, an tadou ar mammou
Ac ar priejou tener, groaguez a bugale
O ! tonet da kiviadi, an eil deuz eguile.

3

An naô oar n'unguet a viz ar foen, a nevez bet kacet
Franz-Job, e ultimatum, da roue ar Serbet
Evit disklerian dezan, renti dean brezel
Eur vro ken biau a hi, oa ket da padout pel.

4

Eun de pe daou goudeze, Guillou II affrontet
Da vinistred ar francizen, a nevez diskleriet
Renti d'ee brezel an eër, oar v'or a oar zouar.
Tristan goalen-a zo bet, biskoaz oar an douar.

5

An de kentan a viz eost, an naontek kant pevarzek
O ! klevet ar c'hleier o zon, an oll oa spouronnet
Mantret oa o halonnou, klevet ar garillon
Henez oa ar henta signal ar mobilizazion.

6

Neuze oa gouelet an dud, o vont a vandennou
Beteg Maeri o farouz, vit klevet ar hellou
Daërou leiz ho daoulagat, fraillet o halonnou
Achu eo ar blijadur, digor an drubullou.

7

Oar dro eur miz goudeze, vije gouelet bemde
Karguet en trainiô an dud, o vonet d'an arme
Dut yaoank en kreiz o brud, a n'o amzer gaëran
Kalz a ne o kiviadi, vit ar vech divezan.

8

An tadou ar mammou a grië, adieu ma bugale
Rac marteze biken ken, n'emp velomp en bue
O ! briata a reont, dour leiz o daoulagat
Darn evit ar vech divean, o ! bebez kalonat.

9

Kenavo ma mami, ma zad, breder a hoarezet
Kemeret kouraj ar ger, na dizezperet ket
Mar be madelez Doue, ar v'oezh ez viniguet
N'in distroô hoaz d'on bro, non nerz a n'on iec'het

10

Lore e oar on zokou, kroajou medalennou
Guir test dimeuz on houraj, ak on vaillantizou
Ar kombat vel lionnet, en treomp bretonnet
Vit brassau enor on brô, n'in zikaro bochet.

11

Kri a kalet oa klevet, ar hlemmou truezuz
An oezoch o partian, d'ar hombajou spontuz
N'eur zonjal n'o friejou, a no bugaligou
Abandonnet barz ar ger, en kreiz an drubullou.

12

N'emez groaguez Breiz-Izel, zo kourajus meurbet
Dastumet mad, deuz e eost, ak a here laket
Rak na zonjent ket e padje ar brezel ken pel
Mez zioas trompet int bet, an all bremana vel.

13

Zetu daou la pe oar dro, kroguet ar hombajou
Ar hanoiou spontuzan, da danna ar herriou
Ak an emgan man zioas, bepred na zihan ket
Nemez ar Prussiannet, zo ive dinerzet.

14

Da kentan a n'eur commanz, Guillou II a zonje
Bezan heru en Paris, pemzek devez goude
Evit ober eun leign vraz, gant e generalet
Mez manquet int oar a hent, biskoas n'int erruet.

15

Louedet eo ar frico hortoz, ar prussiannet
Evet a eo ar champagn, heb na deuz o zanveet
Guillou II ak ar Homprin, zo manket oar o zoll
A manket int vit biken, deuz klevet moez an oll.

16

A koulzkoude Guillou daou, nevoa tout preparet
Gant lorch vraz en e galon, ak ourguil miliguet
Vit e entre triomfal, gant e état major
Cinematografet vijent, gant bombanz ac enor.

17

Mez pa oant erru en Meaux, oar dreujou dor Pariz
Eur spont deut n'ho halon, troet deuz oar o hiz
Neuze generalet Franz, a nevez kommandet
Rei dir a plomb de n'o laër, Rozalie da poket.

18

Gouellan korn oa deuz Franz, a zo gante tannet.
Belgik kazi antier zo gante dizmantret
Bombardet Reims ac Arras, a Verdun goudeze
Mez bepred henjou Pariz, zo harzet dioute.

19

Ar Homprin n'evoa laret, da Willou daou e dad
A kemerreje Verdun, kazi neuz kalounpat
N'eur ober pemzek devez, pe teir zun da irran
Reio ket an pemp mizez, ar breton zo ennan.

20

Rak ar general Petain, zo gant ar Vrettonnet
Ac ar general Nivel, zo routinet meurbet
A na bermetont jamez, da vab enan Guillou
Cedi alhouedou Verdun, rok ze vo gourennou.

21

Rac en Franz a zo ive, kalz a generalet
Oar gondui armou, koulz ac ar prussiannet
Ar general Castelnau, Pau, Sarrail Manoury
Ac ar general mad Joffr, Foch a Galieni.

22

Oll a lakent o oll boan, evit difen o bro
Rei kouraj d'ar Vrettonnet, en kreiz ar hombajou
No deuz netra ezpernet, vit gonit ar viktoar
Barz ar hombajou sanglant, oar vor a oar zouar.

Franz-Job a neuz kazet, oll nerz e zoudardet
D'an Trentin zonzal pladou, an Italiannet
Mez an Italiannet, goad evar o halon
A zalc'h an Autrichiannet, an dezolazion

24

Ar general Cadorna, a zirij e troupou
Kreiz an erch perpetuel, oar leign ar mineou
Onobstant d'o oll mizer, int kourajus meurbet
A zouz a drenv a kasent, An Autrichiannet

25

Ar general Broussiloff, a nevez o ziet
Pa oant a zonzal flastrou, an Italianet
Kaset neuz e roulo braz, vit donnet do stardou
Kant leo het a het, a neuz avanzet e troupou.

26

Eur blijadur eo gouelet, ar hommuniqueou
Pere a lenner bemde, ebarz ar journaliou
En eur ober houech zunvez, labour vad o deuz groet
Gouellet o' fozession, kerriou mad deuz tapet

27

Ar hanoniou a kantjou, o devez kemerret
Fuzulliou, munizionnou, ive mitrailleuzet
A lancerezet bombjou, eun n'ombr braz aneze
Antreet in Gzernovitz, Lemberg devo ive

28

Kemeret ofizourien, ouzpen tri general
Oar dro tri hant mil prizonier, devez hoaz an tu all
Tout n'eur ober houech zunvez, ze a zo kaer meurbet
Groet o deuz eur chasse mad, oar an Autrichianet.

29

Ar tzar Nicolas daou, impalaer ar Russie
A nevez groet vaillantiz, ive barz an Turki
Prestikan Turket a vo, barz ar mor du tollet
Pe a houlennot pardon, ouz ar Tzar daoulinet.

30

Batimanjou roue ar Pruss, a zo bet dispaket
An unan a tregont a viz mæ, en mor an rord gouellet
Rac martolodet bro Zoz, e oa ouz o iedal
Rentet deuz deze kombad, a harp d'o fenn ractal.

31

Dimeuz a batimanjou, naontek o deuz kollet
A re deuz a re gaeran, oar ar Pruss fabriket
Houezet a eo de o fri, gant ar zaosson breman
Galompet in da n'em goach, dreg an Eligolan.

32

Eur loden deuz ar zaosson, ac ar portugalet
A zo ebarz an Afrik, gant eun neubeut Belget
O kemer koloniou, oa d'an Allemandet
Partoud zo goad o ruillal, mez bezan vont trehet

33

Hoaz ar Bulgaret diroll, a zo ouz a zikour
Ar Greçet oaz a klevan, a zo ive treitour
Nemez an Allieët, breman pa int glasset
Laket a deuz ar sieg, oar ar Saloniket.

34

Laket o deuz ar blokuz, oar ar Grèce an antier
Breman a devo famin, ac o goalch a vizer
Evit bezan bet treitour, torret o fromessou
Naon a mizer a kavont, lod o goad a ruillou.

35

Ar roue Constantin, ac oll dut e balez
Da ze gouel ar Republik, deuz her eur goal devez
Eun tan goal ar spontuzan, n'e balez zo kroket
Coat tatoi oa dar roue, an antier zo devet.

36

Eur hazern deuz ar haeran, oa en kichen ar palez
Zo distrujet an antier, barz ar memez devez
Palez ar prinz heritour, lech gleje bean e tron
E oar dro dalvoudeguez, hanter kant million.

Hoaz ar rouanez Olga, nevoa eur pavillon
En ennan tansoriou kaer, istimet seiz million
En poultr ac en ludu, kasi tout in laket.
Dre an tan braz e oa bet, barz ar palez kroket.

38

Pa oa komanzet an tan, ar roue ac e dut
E oa ouz tol e leignan, pa oa zavet ar brud
Demeuz an tan an tatoi ac ar monumanchou
Eben ma devoa leignet, oa hurr o muzellou.

39

Ar roue ar rouanez, e oa deut da wellet
O sonjal nije o zud, a rok an tan trohet
Mez kaer o devoa poangnal, an tan zalc'h da krezki
Kalz anezo zo chomet, barz a hreiz da zevi.

40

Eoar dro daou han den, a zo en beo devez
O klask distruji an tan, e oa spontuz meurbet
Zetu aze eur oalen, dimeuz ar re tristan
Eur kentel vit Constantin, a dud e vro breman.

41

Ar Prussiannet zonzje de, oant dut speredet kaer
O hober nijerezet, da vont uel, an err
O sonjal koz a yaoank, groaguez a bugale
Kement den oa en Pariz, a kolje o huc

42

Mez trompet eo bet Guillou, ac e generalet
O zonzal ar Francizien, eoa manet kousket
En amzer ma oa e dut, ac eon o labourat
En Franç n'imp a m'eump ive, maguet lapouzet mad.

43

Ac a zo ken diligent, ac ar Prussiannet
Restol reont da Willou ar meign neve lanzet
Vel Guinemer, a Navar, Gilber a hoaz re al
Ra deze disken da draou, vite ea vean kann

44

Ar Francizien zo karet, kazi an oll broiou
Bezan zo ouz o zikour, kal a buissanzouz
Belgik ar Montenegro, ar Japon ar Russi
An Itali ar Zaosson, Portugal a Serbi

45

Oll unanet a galon, dre eur guir garante
O kombati assemblez, evel breuder arme
O devez esperanz vraz, trehont ar barbaret
Guillou daou ac ar Homprin, ac o race miliguet

46

Rac ze tadou a mammou, cessed da skuill daëlou
A laket o confianz, en krouer an envou
Pa vo ar goassan ar brezal, ar peurch a herruo
Ac o bugale karet, das ger a distroo

47

A hui groaguez anquennet, o sonjal noz a de
En o priejou karet, pel ouzoch an arme
Kemerret o confianz, en Jean d'Arc biniguet
O priejou deüio d'ar ger, Franz a vo delivret.

48

Neur achui ma histor, enor d'ar Vretonet
Da Franç a d'ar Republik, on goarnament karet
Enor d'ar Allieët, hep rezervi hini
Graz ma vimp vikturiuz, e oar on ennemi.

49

Nep a neuz groet ar recit, zo dister a speret
Deuz e fragiliteou, houl bezan iskuzet
Mar kafet fot en enni, mi o pedi horijan
A mar choket hini, pardon a houennan.

Duault, le 20 Juillet 1916.